

Kannaded vreizhat evit lakaat mouezh Breizh da vezañ klevet

Un aniezh Europa he devez levezon warnomp rag-eeun. Un darn eus arc'hant Europa a vez implijet e Breizh, met e Pariz e vez kemeret an divizoù pennañ. **Breizh n'he deus benveg politikel ebet evit difenn he lazioù dezhi.** Gant an diouer a zileuriadur eeun n'omp ket evit kaozeal eus mererezh gennadoù pouezus-kenañ eus hon armerzh, evel ar pesketaerezh pe al labour-douar.

Ar pezh a fell dimp ober

Bras a-walc'h eo Breizh e-keñver Europa. Gant 4,3 milion a annezidi eo pobletoc'h Breizh eget ur pemzek bro bennak en Europa. Gant ur produadur diabarzh kriz (PDK) en tu all da 100 miliard a euroioù, ez a Breizh d'ober ur galloud armerzhel dreist da 20 bro eus Europa. Un dra a vank dimp : **ur galloud politikel hag armerzhel kevatal da hini Rannvroioù bras Europa.**

- Europa Gevreadel

Fellout a ra dimp kaout muioc'h a zemokratelezh, muioc'h a frankizoù keodedel, sevenadurel hag armerzhel. Fellout a ra dimp kaout muioc'h a Europa. Fellout a ra dimp kaout Europa gevreadel. Europa ar pobloù e servij ar geodedourien. Europa evel ur pol kempouez etre galloudoù bras ar bed, evit an demokratelezh hag ar peoc'h er bed, ar reizhded en armerzh hag er c'henwerzh, an doujañs da ekologiezh ar blanedenn.

- Lakaat Breizh da vezañ gwelet war an dachenn etrebroadel

Breizh, ur Vroad distad anezhi, a rank gallout adkavout he flas e-touez Broadoù Europa. Ret eo dimp en em harpañ war Unaniezh Europa evit ma vo anavezet hor Gwirioù Broadel, evit ma vo ofisiellet ar brezhoneg hag evit adunvanidigezh politikel 5 departamant Breizh. Breizh ne ray berzh nemet dre dalvoudekaat ar chañs m'eo he zalbenn war ar mor digor d'ar bed.

- Difenn Breizh e Brusel

Breizh, gant skoazell Parlamant Europa, a rank gallout kaout he dileuridi dezhi hec'h-unan en ensavadurioù Europa, evel Skos pe Katalonia, ouzhpenn bezañ e-barzh Poellgor ar Rannvroioù. Breizh n'he deus dileuriad ebet dezhi hec'h-unan pa vez 12 kannad gant lwerzhon, ur vro a-vent ganti.

- Difenn an talvoudoù sokial hag ekologel

Ret eo da Europa pouezañ war he folitikerezhioù kenstagded sokial etre an tiriadoù, met ivez etre ar rummadoù micherel, gant ur striv dibar evit ar stummañ. Dleet eo da Europa ober dibaboù ekologel sklaer, dreist-holl war dachenn ar mor, al labour-douar, an treuzdougen, an energiezh hag an enklaskerezh. Mont a ra Strollad Breizh a-du gant ar bennaenn a ragevezh a-fet ar gounit OGK er parkeier.

- Merañ arc'hant Europa

E 2010, pa vo adwelet programmoù Europa, e tleo Breizh hag he c'hannaded en Europa gounit, evel m'he doa graet Elzas e 2002, ma vo treuzkaset mererezh ar FKDR (Font kenstagded ha diorren rannvroel) hag an FSE (Font sokial Europa) a vez meret bremañ gant ar Stad dre hanterouriezh ar brefeded. Heñvel dra, dleet eo da Vreizh gallout merañ war-eeun skoazelloù FEP (Font europat ar pesketaerezh) ha PBLD (Politikerezh boutin al labour-douar), ur politikerezh boutin eus al labour-douar a vo ekologeloc'h ha dasparzhet gwelloc'h etre ar c'hounideien ed, an desaverien loened hag ar brodourien laezh.

***VOTIT EVIT AL LISTENN NEMETI ZO
BREIZHAT HAG EUROPAT***

BREIZH, UN TONKAD EN EUROPA

« AN UNANIEZH EL LIESSEURTED »

Ger-stur Unaniezh Europa a boulz Pobl Breizh da gas dileuridi da Vrusel.

Kalz Bretoned o deus votet ya da-geñver Feur-emglev bonreizhel Europa evit mont er-maez eus karc'har ar C'hwec'hkogn, re all o deus votet nann evit diskouez e oant nec'het gant an treuzlec'hiadurioù. Pa vez 80 % eus al lezennoù a ren hor buhez pemdez diwar reolennoù gant Europa, e tleer adsturiañ politikerezh Europa war-du talvoudoù sokial.

Mont pelloc'h gant savidigezh Europa Evit ur politikerezh sokial engouestlet evit an armerzh hag an implijoù

En diabarzh ne zle ket Unaniezh Europa bezañ ur marc'had hepmuiken.

Gouestlañ a reomp e labourimp evit :

- ur c'hempouezadur kemedel, armerzhel ha sokial evit ma ne vo ket re a gevezerezh etre tiriadoù Europa
- ar frankiz da aozañ servijoù publik kumuniezhel, hag ivez e kement tiriad emren zo en Europa.

En diavaez e tle Unaniezh Europa difenn ur c'henwerzh kempouez er bed. Hep reoliadur etrebroadel war ar frankeskemm, e vo degaset div walenn gant ar goproù izel hag an dumping : distruj an implijoù en Europa, hag ivez un diorroadur diroll ha dañjerus evit ar peurrest eus ar bed..

Gouestlañ a reomp e labourimp evit :

- an implijoù hag ar chemet e greanterezh Europa,
- un armerzh reoliet, kempouez ha reizh evit ar bed.

Europa demokrateloc'h

Skort-kaer eo araokadennoù Feur-emglev Lisboa. Hep Bonreizh ebet, n'eus talvoudegezh ebet gant Karta ar gwirioù diazez.

Gouestlañ a reomp e labourimp evit :

- ur **Vonreizh sklaer hag eeun**, aprouet gant ur referendom hepken evit holl geodedourien Unaniezh Europa, gant ur c'han broadel hag ur banniel anavezet ent ofisiel.
- ur **Parlamant gant ur gwir c'halloud lezennel**.
- ur **Bodad eus Pobloù Europa** ma vo ur plas evit Breizh.
- ur **gwir ouarnamant** hag a ziskouez tuadurioù ar Parlamant
- ur **brezidantelezh stabil** ha sklaer evit an holl.

Europa kreñvoc'h evit ar peoc'h er bed

- **Ret eo da Europa komz gant ur vouezh hepken** en ensavadurioù etrebroadel, evel ABU, dindan renerezh an Dileuriad Meur evit ar Politikerezh Estren, hag a-gevret gant Parlamant Europa. Ret eo da Europa kaout un difennerezh hepmuiken, en emelloù evit ar peoc'h peurgetket. An difennoù broadel hepken zo deuet da vezañ koustus ha diamzeret.

**VOTIT EVIT AL LISTENN NEMETI ZO
BREIZHAT HAG EUROPAT**